

C'HOANT DIMEZI ⁽¹⁾

Ar plac'h a zavas heure mad
Evit lakat he c'hoef ervad.
Tra la la...

He mamm a lavare d'ezi ;
— « Doue, na brava plac'h oc'h c'honi ! »

— « Petra dal d'in-me bea koant
Pa na allan ket kaout va c'hoant ?... »

— « Tavat, va merc'h, na ouelit ket,
'Benn eur bloa, c'honi vo dimezet. »

— Eur bla 'zo hir da skoñll daëro,
A-benn eur bloa me vo maro... »

« A benn eur bloa me vo maro
Dimeñ neuze neb a garo !

« Pa vin maro hag interet
Lakit va bez 'kreiz ar vered.

« Lakit va bez 'kreiz ar vered
Ha warnezan pewart bouked.

« Lakit warnan peder rozen
Diou a vo ru ha diou vo gwenn.

« Diou a vo ru ha diou 'vo gwenn
'Vit ma vo kanvou en peb penn.

« Diou a vo ru ha diou 'vo glaz
Vit ma vo kanvou en peb plas.

« Ar c'hloer yaouank pa dremenfont
Peb a bater a lavarfont.

« Peb a bater, peb a ave
'Vit ar plac' hig a vo aze... »

Ar c'hloaregig a lavare,
I re ar vered, pa dremene :

— « Setu aze bez eur plac'h koant
A zo marvet gant keun d'he c'hoant !

« Gant keun d'eur c'hloaregig yaouank
Deuz koste ar gêr a Wengamp. »

Ar plac'h yaouank a lavare
Diwar bordig he bez neve :

— « Kloareg yaouank it en hoc'h hent
Me a zo breman evel kent !

« Kloareg yaouank it en ho tro,
Ha lez't en peoc'h ar re varo ! »

(1) Tennaet dionz *Soniou Breiz-Izel*, gant F. M. Luzel hag A. ar Braz. (Paris, Bouillon, Edit. 1886). T. 1, p. 222. Gwellet eun henvedadigez vrag diouti en galleg en : *La Chanson de la Bretagne*, gant A. Le Braz. p. 182.